

Intanves Tonkedek.

Nag eun intanves a Tonkedek,
 Zo neves maro e friet,
 E ia ar bloa man da klask e boed
 E lec'h ma ne vo ked anaveet.

En tal dor e otrou pa e erruet
 Nag eun tam bara e deus goulennet.

en an' Doue otrou eun tam bara
 Ne meus me bed tam an de man.
 (1) *Prest on gant an naon e fatigha (barré)*
 a tri bughel paour a meus ive
 a varv gant an naon ker kouls a me.

— Ma na c'heus te tri a vugale,
 ke dar gher a laz unan a ne.
 ke dar gher a laz unan a dri
 Da rei dan daou al da zebri.

An intanves paour a ia dar gher
 Ag i eun neubeudik en koler
 En avis laza e zri bughel
 Entren ras ebars eur chapel.

Di ganec'h gwerc'hes e houlenan
 Pe me o laz pe me ne gran ?

Dre ma tostae dimeus e zi
 ne kleve sivoas nemet ar gri
 En an' Doue mam eun tam bara
 Pe gant an naon e fatigan.

E pelec'h e roffen me tid bara
 Pa nen deus draillen en ti ma ?
 E pelec'h e roffen me tid bara ?
 Me ghemer eur gontel da lac'ha !

eur bughel bihan a voa en ti
 en oad a zaou vis pe a dri :

en an' Doue or mam nor(1) lazit ked,
 ni a iel om zri da glask or boet !
 Ni a iel om zri da glask or boet
 E lec'h na vim(1) ked anavezet.

(1) an intanves paour ia de(1) gwele
 eb avis(1) rei tam de bughale.
 Pa voa en e gwele kousket
 E El mad en ti zo entreet.

Bonchour a joa oll en ti man
 an intanvez pellec'h e man : (2)

Piou zo aze dar poent man en-nos
 Pa e ed an ol dud da repos ?

Ag intanves nan de oc'h el mad,
 a zo deud aman a beurz Doue an tad,
 Da lavaret dec'hu intanves
 Rei do pugale bara a lies.

A belec'h roffen me de bara
 Pa nen deus draillen en ti ma ?

Segal o poa adet dec'h ar beure
 ag a vo dare ebars cres de.
 Kid dar parc a lakit en droc'ha
 Kassit en dar vilin da vala.

Goude ma vo dec'hu malet
 Nag it tu dan tiforn de boazet.
 id gantan e lec'h vo muan a tud,
 Evit ma vo goelet ar burzud.

Kassit eun tam doc'h otrou anezan,
 Da tanva ar segal ar bloa man
 ha na kassit ket nemeur dezan,
 Evit ar pes en deus da vevan !

Deid otrou deid eun tam bara
 Deuz ar segal nevez ar bloa ma.
 — Dibid dime va marc'h inkane,
 Ma zin da velet ar virione.

Kri viche ar galon na voelche
Ebars an parc neb a viche.

Goelet an douar digoret
An otrou ag e loen lonket.

Na voa chomet var an douar
Ne med pen an aneval brutal.

*Au 86 recto, seulement un titre : Intanves Tonquédec.
écriture du Dr. Halléguen.*

*Une trad. fr. de ce texte — écrite au crayon — par Penguern, se trouve
aux folios 87, 88 89 et 90 rectos.*

*Il y a un grand nombre de corrections faites au crayon, qui sont d'une autre
main ; je ne les ai pas relevées. J'ai copié le texte primitif et les corrections
faites à l'encre.*

(1) Vers barré, remplacé par le précédent dans l'interligne supérieur.

*(1) Corrections faites au crayon : mots barrés sur la ligne, et mots ajoutés
dans l'interligne supérieur.*

*en an' Doue or mam nor : ag or mamik paour nor (barré)
na vim : ne visim (barré)
Mont a ra (barré avant : an intanves)
eb avis : siwoas ep (barré)*

*(2) Ces deux vers sont ajoutés (d'une encre un peu plus pâle) dans l'intervalle
qui sépare la strophe précédente de la strophe suivante. L'écriture me sem-
ble être d'une autre main.*